
AR ZOUBEN-LAEZ GWIN-ARDANT



En eur gomans kanan eskuz a c'houlennan
Digant keiment hial a zo prezant aman ;

Abeurz an oac'h yaouank e oan me bet pedet
Da rei d'ean zouben noz-kentan e eured.

Mes elec'h souben-laez, me rei d'ac'h da danvad
Malaga ha Champagn, 'ikeuriou deread ;

Biskoaz n'ez eus evel seurt ganté 'barz ar Vro,
Me 'm eus groët o digas war eon deus a Vordo.

N'an eus prinz, na baron, roue, nag impaleur
A gement n'o defe tanvaet ma likeur ;

Pa 'z on deut war-eon evit o regali
An tanva kentan a zo d'ho pried ha c'honi.

An eil tanva a zo d'an daou den a enor
O deus ho konduet ouz töl ar Redemptor,

Hag an dride tanva zo d'ho mam ha d'ho tad
Pere o deus glac'har o tenet d'ho kwitad

D'ar bevared 'pedan breudeur ha c'hoarezed,
Kement hini ho kar : Kerent ha mignoned.

DA GANA EUS TOL AN EURED

An devez a hirie, pebez kontantamant,
Gwelet an diou famill ha kement zo prezant ;

Aman 'n em unnet gant kalz a garante
Diredet holl gant joa en dro d'an dud neve.

Na gredan ket e ve den er gompagnunez
A gement an defe neb seurt tristedigez,

Koul-koude 'm eus klevet aliez lavaret :
Er bed-man n'an eus ket a wir evurusted. . .

Nag ez eo glac'harus evit eur vam, eun tad
Gwelet o bugale o tonet d'ho c'hwitad ;

Maget o deus anè gant poan, tristidigez
Ha rei d'e o c'honje dont d'ar briedelez.

Breman daou zen yaouank, c'houi a vo oblijet
Da zont d'o c'hennerzi keit ma voint dre ar bed ;

C'houi ho peus bet ive glac'har ha kalonad
O tont da gimiadi eus ho mam hag o tad.

Ho kalon a zo bet treuzet gant ar glac'har
O laret kenavo ha d'ho preur ha d'ho c'hoar,

'N'eur blijadur dispar bemde oac'h unanet
Hag en noz hag en de ho peus en em garet.

Gant ho polante vad ho peus en em roet
Ha setu c'houi breman unanet d'eur pried :

— Kenavo, tad ha mam, breudeur ha c'hoarezed,
Me ac'h a da zerc'hel menaj gant ma fried. . .

Ar briedelez eo kaeran tra zo er bed,
Gant Doue E-unan eo bet diazeet

Pa oa krouet Adam gant Krouer er bed-man
Eo bet roet Eva evit pried d'ezan.

Rak-se daou zen yaouank bezet eta fizianz
Ha Doue a rei d'ac'h prosperite ha chanz ;

Ha pa deñ ar maro d'o separi ho taou
Gras d'ac'h d'en em gavet assemblez en Nenvou !

LENEINDRE.

AR PILHAOUER



Va zad en deus va dimezet
Da eur flierius pilhaouer,
El Lokeffret ez on ganet,
En koumanant Toull-al-laer ;
Foei, foei, foei war va zammig aotrou
Gant e stoup hag e he bithou ! (bis)

Tri devez goule va eured,
E oa foar el Landerne,
A va lapouz prim dihonet
A zav maez eus e wele,
Foei, foei, foei war va zammig aotrou
Gant e stoup hag e bithou ! (bis)

Drailha 'ra eun anter pator,
Tana 'ra e gorn butan,
Tapout e ra e grog-pouezer,
Evit mont war hent Sizun.
Foei, foei, foei war va zammig aotrou
Gant e stoup hag e bithou ! (bis)

Gantan 'n em gav kamaraded,
En eur vond da bilhaoua,
E holl arc'hant hen doa fouetet
Ha tom pilhou n'hen devoa.
Foei, foei, foei war va zammig aotrou
Gant e stoup hag e bilhou ! (bis)

Pa oa an hanter-noz sonet,
En iliz vraz ar Fouille,
Me oa, intanvez glac'haret,
Va-unan 'barz va gwele.
Foei, foei, foei war va zammig aotrou
Gant e stoup hag e bilhou ! (bis)

Mont a'ra d'ar vilin paper,
Gant eur zac'hadig pilhou,
Kalz buhanoc'h eget eul laer,
Rak preset eo an dellou.
Foei, foei, foei war va zammig aotrou
Gant e stoup hag e bilhou ! (bis)

Na pa zistro d'ar goumanant,
Raktal e zav eun tam kroz,
— E pelec'h eman da arc'hant ?
... Me gred e maint en ez kof !
Foei, foei, foei war va zammig aotrou
Gant e stoup hag e bilhou ! (bis)

Pa 'za Yannig d'ar pardonieu,
Bepred e ve mezo dall,
Prest e oa da goll e vragou,
El Lokeffret an deiz all !
Foei, foei, foei war va zammig aotrou
Gant e stoup hag e bilhou ! (bis)

Pa deuto ar c'hiz er vro-man
Da derri an dimeziou,
Me a yelo en eur gan
Pell eus potred ar pilhou.
Foei, foei, foei war va zammig aotrou
Gant e stoup hag e bilhou ! (bis)

Pa deuto karrig an Ankou
D'ober e dro er vro-man,
Me a gerzo war e roudou
Hag eu pedo d'hen zamman,
Foei, foei, foei war va zammig aotrou
Gant e stoup hag e bilhou ! (bis)

Ha p'hen do an ankou bountet,
Toull ar fliers pilhaouer,
Me a gerzo da lavaret
Da goumanant Toull-al-laer :
— Maro eo va zammig aotrou
War e stoup hag e bilhou ! (bis)

Pa vo groet an interaman,
Gant ar paourkez pilhaouer
E vo kavet yalc'h an arc'hant,
Sac'h pilhou ha krog-pouezer
Maro eo va zammig aotrou
War e stoup hag e bilhou ! (bis)

Red vo komz d'an aotrou person
Deuz ar paourkez pilhaouer,
Ma vo kanet al Liberon
Hag ouspenn al lip e... rer !
Maro eo va zammig aotrou
War e stoup hag e bilhou ! (bis)



MERC'HED LOKENOLE



Merc'hedou Lokenole a zo merc'hed a stad
Na brizont ket da zansal nemed gant potred vad.

Merc'hedou Lokenole ac'h a d'ar baladen,
Diarc'hen, divouchouer, koef abed war o fenn.

Merc'hedou Lokenole o devez prometet
Monet en pelerinach da Zant-Yan beniget.

Dre c'hras an Aotrou Doue da Zant-Yan n'int ket et
Rak ebarz e Plougasnou ez int bet diskennek;

Ar person a lavare d'ar zil en ofern-bred :
— Diwallit merc'hed yaouank gant aon vefec'h tromplet

Diwallit merc'hed yaouank gant aon vefec'h tromplet
Gant ar c'habiten Lablond hag e vartoloded.



Ar merc'hed a respontas eus a draon an iliz :
— Prezegit, aotro person, ni a rañs hor giz !

E oa ket peur-lavaret, na mad ar gousperoñ,
Ne oa ar merc'hed yaouank er gear a Blougasnou.

Ebarz li Mari Beron ez int bel diskennet
O, ya, dre ma oa ganté yalc'hou martoloded...

Ar merc'hedou a drinke hag a lipe o beg
Hag ar warzed a gane, a ganne en galleg.

Hag ar warzed a gane, a gane en gallek,
Hag ar merc'hed a c'hoarze dre na intentent ket !

Nemed eur dortez vihan deus ar vouk Karantek,
Honnez oa bet er gouent o tiski ar gallek,

Honnez oa bet er gouent o tiski ar galleg,
Hag a bede mil malloz war ar vartoloded.

Ar warsed a lavare, seder o daoulagad,
Da verc'hed Lokenote, araok dont d'o c'hwitad :

— Mar vefemp ni intanvien, gras d'emp na vefomp ket,
Ni a zeñs c'hoaz eur vech, c'hoaz eur wech d'o kwelet...

Hag a zigaso d'oc'h-c'houi, neuze eur chapeled,
Ha gwalemou arc'hant gwenn d'ho kamaradezed.

Merc'hedou Lokenote, 'n eur ouela 'lavare
Da Lablond ar c'habiter : -- Ni hor bo keaz d'it-te...

Kenavo dit-te, Lablond, o ya pa m'out o vent,
Ni garje a greiz kalon e vijes c'hoaz o tont !

Merc'hedou Lokenole a ouele war ar c'hae
Da Lablond ar c'habiten... Allaz ! partiet è !

Lablond a zo partiet ha et emaez ar vro,
Ha merc'hed Lokenole a c'hortoz e zistro.

Me gred, da Lokenole, na zistro biken,
Kaer o devez ar merc'hed kavout poan hag anken.

Kaer o devez ar merc'hed gouela d'ezan dourek,
Ne zeüo ket da gana d'ezè zoniou gallek.

Rak-se 'ta merc'hed yaouank, a galon me ho ped,
Ankounac'hañt Lablond hag e vartoloded.

Ankounac'hañt Lablond hag e vartoloded,
Ha bezit ive furoc'h en amzer da zonet...

Ha bezit ive furoc'h en amzer da zonet,
Furoc'h ma 'z hoc'h bet merc'hed en amzer dremenet...

